

Kanomp ar festou noz

Hag an dansou (bis)

Kanomp ar festou noz

Ha dansou an hini goz.

War don ar c'hrampoez gwiniz

Savomp eur son, pe ma ar chiz, la, la

Var don ar c'hrampoez gwiniz

Savomp eur son, Kerneviz

^m Bennet ar patatez

En holl barkou (bis)

Bennet ar patatez

Dansomp holl gant leonez!

Bech a zo bet tro var dro

Pleget hon c'hein war an ero, la, la!

Bech a zo bet tro var dro

Dansomp brema eun danz tro.

^m Allo! buhan jistr mad

War an toliou (bis)

Allo! buhan jistr mad

Evid rei nerz d'ar Breizad

War leach eun devez labour

Pleget hon c'horf ovel eun skour, la, la!

War leach eun devez labour

E ve pec'had eva doue!

Un, daou, tri, pevar, pemp

Dansomp brema (bis)

Un, daou, tri, pevar, pemp

Hon roched a zo var dremp!

Paotred ha merc'hed samblez

M'eromp al leur a strop botez, la, la!

Paotred ha merc'hed samblez

Houma zo eul leur nevez

Ar foen zo dastumet

Er chamillou (bis)

Ar foen zo dastumet

Hag an ed a zo modet

Ar goanv zo arvu brema

Gant miz Here barz an vro ma, la, la!

Ar goanv zo arvu brema

Prestik e vo red kreina!

Da c'hortez, Bretoned,

Ero d'an dansou (bis)

Da c'hortez, Bretoned,

Kanomp en dro ar merc'hed.

Rag pa zeui an Ankou koz

D'ober ~~er~~ dro barz an baroz, la, la!

Rag pa zeui an Ankou koz

Fin e vo d'ar festou noz.